

Ar Bikted, en Europa an Oadvezhioù teñval

Ar Bikted, sed aze ur bobl gelt hag he deus lakaet an istorourien (ha tud all) da zuañ paper diwar o fenn. Brezelerien ferv anezho aet da get pell zo bremañ. Aet da get gwir eo, met evit pe abeg ?



Ur brezelour hag ur vrezelourez pikt treset e 1739 gant James Robinson.

d iazezet e oa ar Bikted e-touez meuriadoù all en hanternoz Enez Vreizh. Ar Romaned n'int morse deuet a-benn d'o sujañ zoken ! Douar ar Bikted aloubet ? Biken james ! Ken gwir e oa kement-se ma rankas an impalaer roman Hadrien sevel ur voger er bloavezh 122 da zerc'hel o bagadoù "loened gouez" da zirollañ war e legionoù. Gant ar c'hroniker Eumenius e oant bet badezet "Picti" (livet) abalamour ma oa

livet o c'horf. Evit gwir e oa goloet o c'hroc'henn a dresadennoù. Deskrivet e oant evel "barbared feuls ha spontus" ha ne oa den ebet evit kompren o yezh¹ nag o skritur. Ken kevrinus ha ken gouez ar Bikted-se, a-benn ar fin...

➔ KLANNOÙ FRAMMET MAT

En em zispleg a rae o rouantelezh, Piktavia, eus norzh Bro-Skos betek Iwerzhon. Setu penaos e vezent deskrivet

gant skrivagnerien o amzer : postek, blev hir dezho, noazh-ran en em gannent, goloet o c'horf gant un danvezenn struzhel glas da spontañ o enebourien. Seul braouac'hetc'h ar Romaned gant o neuz dispar ma oa brezelerezed eus o gwashañ brezelerien. Ur stroñs e-keñver stuz hag e-keñver from war un dro ! E-touez ar Bikted (hag e sevenadurioù all ivez) e veze desket implij ar c'hleze hag ar skoed d'ar merc'hed koulz ha d'ar baotred, savet e veze bagadoù argadiñ


➔ À L'origine de l'Écosse, Les Pictes gant Frédéric Kurzawa

Ur mell levr diwar-benn ur bobl gelt ha n'eo ket ken brudet-se ha dreist-holl ne ouzer ket kalz a draoù diwar o fenn. Frédéric Kurzawa en deus skrivet al levr gallek kentañ diwar-benn ar bobl-se hag a zastum an holl ouiziegezhioù rastellet betek-henn. Mammennoù skrivet gant ar Bikted o-unan n'eus nemet unan : div listennad roueed. An darn vrasañ eus ar mammennoù skrivet a zeu eus pobloù all tro-dro dezho. Hag ar vammenn wellañ evit gouzout traoù diwar o fenn eo an delwennoù savet gant ar Bikted. Div lodenn zo el levr-mañ : al lodenn gentañ zo rannet etre an istor politikel, red an darvoudoù dibaoe ar 6^{vet} kantved (roudoù diarvar kentañ eus ar Bikted) betek an 10^{vet} kantved, hag istor ar bobl gant lodennoù tematek : relijion, emgann, annez, arz... An eil lodenn zo stagadennoù enni met mont a ra d'ober kazimant un hanter eus al levr, memes tra. Aze e komzer da skouer eus plas ar Bikted el lennegezh, er filmoù... Alies e skriv Frédéric Kurzawa n'eur ket peursur eus an dra-mañ-tra pe e vank titouroù. A-wechoù e c'haller santout eo bet start skrivañ lodennoù zo eus al levr abalamour da se. Dedennus eo koulskoude al lodennoù war ar yezh hag an darempredoù gant ar pobloù tro-dro, ar C'houezeled paneveken. Ar re a blij Bro-Skos dezhe a vo laouen gant al levr-mañ.

Maksim Touzé

À L'origine de l'Écosse, Les Pictes, gant Frédéric Kurzawa, Yorán Embanner (2018).


Evit gouzout hiroc'h : www.yoran-embanner.com



Ar Bikted en ul levrenn eus Asteriks (2013), pe er film hollywoodian King Arthur (2004).



Pep gwir miret strizh.



Ar "Maen Sarpant" en Obar Leamnach (Aberlemno).



Catfish Jim and the soapfish at English Wikipedia / Wikimedia Commons © @ 3.0

eus an dibab gant ar vegenn anezho. Gant ar merc'hed e veze legadet o boazioù ha kustumoù a rumm da rumm. Hiniennoù anezho a vefe bet e penn klannoù zokenoc'h. Pleustriñ a raent an arzoù ivez. Mein-sonn zo bet kavet, telennoù ha fleutoù tribegek engravadurioù warno.

➔ AN DISKAR

En 9^{vet} kantved e kouezhas ar Vikinged war o chouk a-daol trumm. Ar vrezelerien hag ar brezelerezed taer a gavas re kreñvoc'h evito ar wech-se. Argaset e voent diouzh an enezeg Shetland hag Orc'h. Lazhet e voe ar roue pikt Eoganan Mac Oengus e 839. E warlerc'hidi er galloud a voe diskaret gant Kenneth I^{añ}

Mac Alpin, roue ar Skoted, koshañ kevezerien ar Bikted anezho. Dont a reas ar Skoted a-benn da gevreañ ar pobloù lec'hiet e norzh moger Hadrian. Sevel a rejont e giz-se an unpenniezh skosat kentañ. Echu e oa da vat gant ar Bikted ar wech-mañ...

➔ BOEMET GANT KEVRIN AR BIKTED

Kenderc'hel a ra ar Bikted da voemañ an dud evelato. An holl zo chomet berr da zablenn o arouezioù kavet war 200 maen-sonn (kemenn d'al lennerien troet war ar seurt studi !). En 19^{vet} kantved, ar folklorour skosat David Mac Ritchie a savas *Damkaniezh ar Bikted-Pigmeed* : hervezañ, ar Bikted a vije bet tud mentet

bihan hag ar boudiged ur marsoñj anezho (!).

Er bloavezhioù 1930, Robert E Howard (tad *Conan the Barbarian*) a lakaas ar vrezelerien ha brezelerezed pikt e kreizig-kreiz e ved gouron-faltazi. E 2013 en em gavas "an dud o c'hroc'henn livet" en un albom gant Asteriks ar wech-mañ.

Aet ar Bikted da get a-dra-sur, pell a vezañ ankouaet evelkent...

Denez Bodat

Mammenn : À L'origine de l'Écosse, Les Pictes, gant Frédéric Kurzawa, Yorán Embanner (2018) [s.o. sternig].

1. Kavet e vez roudoù anezhi el lec'havadurezh c'hoazh. Ne ouzer ket resis penaos e oant erret eno met o yezh a oa eus rummad ar yezhoù predenek sur a-walc'h.